

Bremañ Gwengolo / Septembre
Breizh / Bretagne

 14 | Bremañ • niv.359
 YEZH

Babigoù Breizh

o deus o magouri vrezhonek

Diwar skouer skolioù Diwan ez eus bet ijinet gant ur skipailh tud degemer bugaligoù e brezhoneg penn-da-benn, a-raok o zri bloaz. Lañset o deus raktres ur vikromagouri un nebeud bloavezhioù zo. N'eo ket unan nemetken met div vagouri hag a vo digoret er bloaz-mañ e Kêr-benn Bro-Gwened. D'an 3 a viz Here e vo degemeret bugale er c'hentañ ti-poupigoù brezhonek dre soubidigezh e Breizh a-bezh. Un taol-kaer eo evit ar gevredigezh Babigoù Breizh.



Erwan ar C'hoadig (Ofis Publik ar Brezhoneg), Fabienne Couëpel (prezidantez Babigoù Breizh), Virginie Pronost (Divskouarn), David Robo (maer Gwened) ha Christine Penhouet (eil-maerez karget eus ar vugaligoù) dirak magouri Karter Koulev, da-gerver an emvod-kelaouiñ a oa bet d'an 11 a viz Gouere.

Pemp bloaz zo eo bet savet ar gevredigezh Babigoù Breizh gant ar soñj digeriñ tiez-poupigoù brezhonek dre soubidigezh. Labouret e vez evit ma vefe lakaet ar vugale en o bleud dre ar brezhoneg. Goude bloavezhioù a labour ez eo deuet a-benn izili Babigoù Breizh da lakaat o raktres e pleustr. Daou lec'h evit degemer ar vugale a-raok o zri bloaz, da lavaret eo a-raok ar skol-vamm, zo warnes digeriñ. "Simpl eo an traoù" eme Batrick Bécharde teñzorer Babigoù Breizh. "Ul lodenn eus raktres pedagogel an div vikromagouri-se eo ar brezhoneg. Ar vuhez pemdez hag an oberoù kelenn a vo e brezhoneg met, evel-just, e vo un tamm galleg evit ober al liamm gant tud ar vugale, un tamm e memes mod ha Diwan e vo a-benn ar fin. Daou lec'h nevez-flamm a vo, e kornôg hag e mervent Gwened, evit 10 a vugale e pep unan anezhe. Meur a vod degemer a zo, plaen pe ur wezh an amzer. N'eo ket ret d'ar vugale dont leun amzer d'ar vagouri, war ur plas e c'hell bezañ daou pe dri bugel."

SKOAZELLOÙ LIESSEURT

D'an 3 a viz Here e vo digoret al lec'h kentañ en Annez Kervihan, bali ar Marichal Juin, e Gwened. An eil a vo da-heul, a-raok dilost ar bloaz, en Annez Karlina, bali ar Jeneral Borgnis-Desbordes. "Ur raktres bras a-walc'h eo ha deuet omp a-benn da sevel anezhañ a-drugarez da sikour ar

Rannvro he deus plantet 50 000 € e-barzh" eme Batrick Bécharde. "Sikouret omp ivez gant Kuzul-departamant ar Mor-Bihan ha ti-kêr Gwened hag o deus skoazellet ac'hanomp da labourat gant Ofisoù lojeiz Bretagne Sud Habitat ha Vannes Golfe Habitat. Gant Ofis Publik ar Brezhoneg hon eus labouret ivez, gant ar gevredigezh Divskouarn, gant kef ar goprou-tiegezh, gant gwarez ar mammoù hag ar vugale ha gant ajañs-rannvro ar yec'hed, kement-se evit doujañ ouzh ar reolennoù a zo evit degemerout babigoù" emezañ da resisaat.

PLASOÙ HA POSTOÙ

Prenet ez eus bet c'hwec'h plas gant ti-kêr Gwened met chom a ra plasoù bepred. "Klasket e vo ganeomp gwerzhañ plasoù da embregerezhioù zo pe d'ar c'huzul-

departamant evit ma vefe marc'hadmatoc'h evit tud ar vugale. Degemer a reomp ragenskrivadurioù en ur c'hortoz asant kef ar goprou-tiegezh hag a vo roet deomp da vare an dïstro-skol" emezañ. Tutaet ez eus bet ur renerez ganti an diplom Desavourez Bugale Yaouank evit ober war-dro an div vagouri, met emañ bepred tud Babigoù Breizh o klask war-lerc'h animatourien diplomoù ganto, ur CAP Bugaligoù, ha tud karget eus ar boued hag ar c'hempenn. Tutaet e vint e-kerzh miz Gwengolo. Ha Babigoù Breizh en amzer da zont ? Klasket e vo mont pelloc'h evit sevel frammoù all ? "Ya, klasket e vo mont pelloc'h met aze eo ar bazenn gentañ, gwelet e vo ha berzh a raio."

Joan Bizien

Evit gouzout hiroc'h :
 Pgz : 02 97 61 42 07
 Postel : babigoubreizh@laposte.net

Emañ Babigoù Breizh o klask war-lerc'h...

Buhezourien(ezed) bugaligoù

Evit kregiñ ganti d'an 19 a viz Gwengolo 2011 e Gwened. Al labour a zo : degemer hag ober war-dro ar vugale e div vikromagouri vrezhonek. Doare den : CAP bugaligoù (pe kevatal), ha brezhoneger. Ar gopr a vo hervez emglev stroll ar SNAEC SO.

Un den karget eus ar c'hempenn hag un den karget eus ar boued

D'an 19 a viz Gwengolo 2011 e vo kroget e Gwened. Doare den : brezhoneger pe damvrezhoneger, mennet da zeskiñ hag ar gopr a vo hervez emglev stroll ar SNAEC SO.

Evit lakaat e anv, kas ur CV hag ul lizher emginnig da :
 Itron Fabienne Couëpel, prezidantez Babigoù Breizh, Kroaz Lokmikael, 56390 GREGAM.

Crèches Babigou Breizh. Il reste encore des places

Les deux premières microcrèches bilingues breton-français vont ouvrir dans les prochaines semaines. L'association Babigou Breizh invite les maires de l'agglomération à acheter des places.

Une nouvelle microcrèche bilingue ouvrira sur le site de la rue Renault, mi-novembre.



C'est au rez-de-chaussée d'un immeuble d'habitation flambant neuf, situé tout près de la chambre des métiers, rue Renault, que l'une des deux microcrèches des Babigou Breizh va prendre ses quartiers vers la mi-novembre. Il s'agira de la seconde structure du genre à ouvrir ses portes à Vannes puisque celle de Conleau (résidence Ker Bihan) aura déjà commencé à fonctionner à compter du 3 octobre prochain. C'est dire si les échéances approchent à grand pas pour l'association à l'origine de ce projet centré sur le bilinguisme breton/français. « Nous continuons à démarcher les collectivités et les entreprises, explique Fabienne Couëpel, présidente des Babigou Breizh. Pour l'instant, six enfants sont inscrits à la microcrèche de Conleau

laquelle dispose au total de dix places. Celle de la rue Renault en proposera dix autres. Il existe des demandes de parents qui habitent à l'extérieur de Vannes, mais pour accueillir leurs enfants, il faut que les communes où ils résident achètent des places ».

« J'encourage les autres maires de l'agglomération »
Un appel relayé hier par le maire de Vannes, David Robo. « La ville a fait l'acquisition de six places qui seront attribuées aux familles. J'encourage les autres maires de l'agglomération à avoir la même démarche », insiste-t-il, non sans oublier de rappeler que Vannes est la ville de Bretagne où l'on scolarise le plus grand nombre d'enfants dans les filières d'enseignement faisant la part belle à la lan-

gue bretonne (Dihun, Div Yezh et Diwan). « Ces deux microcrèches sont ouvertes à toutes les familles, qu'elles soient brittoniques ou non, et quel que soit le choix de la scolarisation », rappelle Fabienne Couëpel, la présidente des Babigou Breizh qui a reçu les agréments de la Protection maternelle et infantile et de l'Agence régionale de la santé.

Précision de la Caisse d'allocations familiales
Hormis le soutien de la ville de Vannes, le projet a reçu également le soutien financier ou matériel de la Région Bretagne, du conseil général du Morbihan, de Bretagne Sud Habitat, de Vannes Golfe Habitat et de l'Office de la langue bretonne (Ofis ar Brezho-

neg). Sans oublier la Caisse d'allocations familiales du Morbihan, principal financeur. Son président, Norbert Hellay, a profité de sa présence hier sur le chantier de la seconde microcrèche pour souligner que « les parents qui ne souhaitent pas que leur enfant suive des activités en breton doivent pouvoir obtenir le même service en français au sein de ces crèches ». Un point qui ne devrait pas cependant pas poser de grandes difficultés dans la pratique « étant donné que le personnel embauché est bilingue », notent les responsables interrogés.

> Pratique
Inscriptions et achat de places : Babigou Breizh, tél. 02.97.61.42.07 ; courriel : babigoubreizh@laposte.net

A-nevez

Mikro-magourioù divyezhek a vo digoret a-benn nebeut

3

Sokial

Tud deus ar burev hag ar C'huzul-merañ oc'h aozañ an emvod-kalouñ

Rannvro da sikour ar gevredigezh evit kas al labour diorren da benn," emez. Kuzul ar Morbihan zo prest da roiñ 30000€. Degas a ray Kef Ar Famihou ar sammad brasañ gant 40% d'iozh kouz an dafar kentañ, ha gant e skoazell da gement familh. Klub Embregerezhioù Breizh, hag a vod perchenned embregerezhioù a-du gant hor yezh, en deus komprenet iskenroudegezh ar staliadur-se evit kas al labour e brezhoneg war-raok, ha diwar-se sikour gante da breñañ dafar. Krog eo ar gevredigezh da werzhañ plasoù ha kemennet he doa ar brezidantez e vo prenet c'hwec'h gant li-kêr Gwened evit Gwenediz. Un nebeud plasoù a vefe kemeret gant ar C'huzul Departamant evit familhoù en dienez. "Krog omp da vont en darempred gant embregerezhioù ar c'horn-bro evit kinnig dezhe prenañ plasoù evit o implijed," he doa laret ivez.

Tri den zo bel implijet gant Babigou Breizh. « O sevel ar reolennoù diabarzh hag o prenañ an dafar emañ er mare-mañ. Hiriv en em gav div animatorez war o lech labour. Gellat a rimp krogñ gant aozañ degemer ar vugalgou kentañ,» eme ar renerez. «E brezhoneg e vefe degemeret ha desavet ar vugale a-hed an deiz. Degemer ha rentañ-kont deus an devezhioù e galling a vo graet d'ozid d'an alichañ, anat deoc'h.» Evit a sell impli ar brezhoneg, emañ Divskouarn hag Ofis Publik ar Brezhoneg er jee ivez, panevet war tachen an desavel e brezhoneg, ar c'heriaoueg ispalial hag an tuta.

Enskrivadurioù, prenañ plasoù : 02.97.61.42.07, babigoubreizh@laposte.net ; divskouarn.free.fr ; rubrikenn Babigou Breizh.

Patrick Bécharad

A-raok pell e vo digoret e Gwened doriou ar c'hentañ mikro-magourioù divyezhek. Gant izili ar gevredigezh Babigou Breizh emañ kaset al labour digorñ da benn, hag int tud tomm d'ar brezhoneg, tost ouz ar skolioù divyezhek. D'al Lun 19 a viz Gwengolo e oa en gavet un tregont den bennak en ur chanter e karter Kambard Labour-Douar, ma vo digoret an eil vugouri, evit gwelet penaos ec'h a war-raok.

Gant Fabienne Couëpel, prezidantez Babigou Breizh, ha Gwenaél Warbesson ar renerez an-dihenn "Desaverezh Babigou", gant, e oa bet kemennet penaos e oa kont gant digoradur da zont an daou lech ha tuta an implijed. Desavet e oa tud en anv an aozadurioù zo o kas ar staliadur da benn. Rannvro Breizh, Kuzul Meur ar Morbihan,

Kef ar Famihou, Kêr Wened, Gwarez ar Mammoù hag ar Vugalgou, Ajañs-Rannvro ar Yezhed, Ofis Publik ar Brezhoneg hag an daou ofis anez, Bretagne Sud Habitat ha Vannes Golfe Habitat, ar c'hevredigezhioù Divskouarn ha Klub Embregerezhioù Breizh. D'an 3 a viz Here e vo digoret doriou ar mikro-magourioù kentañ en ul lojez e zoni ouz reolennoù yezhed ha surentez ar vugalgou, en annez nevez karter Koulvez. Eno e vo degemeret gant tud a-vicher. CAP ha brezhoneg gante, dek krouadur war un dro ar muan. Memes mod e vo evit an eil magouri a vo digoret a-raok fin ar bloaz.

Arc'hant zo er jee. Rannvro Breizh ha Kuzul ar Morbihan a sikour ar gevredigezh gant yañchadou evit krogñ gant. Gant Lena Louarn e oa bet lakeet 50000€ war an daol en anv ar Rannvro. "Der'chal a ralo ar

Chanter an Annez Karfina ma vo digoret an eil vugouri.